

Ha n'out ket skuizh ?

Ha n'out ket skuizh ?
Ha n'out ket skuizh ?
D'ar red, d'ar red, d'ar red,
Er Redadeg !

Ha n'out ket skuizh ?
Ha n'out ket skuizh ?
D'ar red, d'ar red, d'ar red,
Er redadeg !

N'on ket skuizh, tamm ebet
O kanañ e brezhoneg,
O flapañ e brezhoneg,
O c'hwezhañ er Redadeg

N'on ket skuizh, tamm ebet
O farsal e brezhoneg,
O tañsal e brezhoneg,
Oc'h huchal er Redadeg

Redek a ran abaoe 10 vloaz
Ha n'on ket prest da chom a-sav

Ha n'out ket skuizh ?
Ha n'out ket skuizh ?
D'ar red, d'ar red, d'ar red
Er Redadeg !

Ha n'out ket skuizh ?
Ha n'out ket skuizh ?
D'ar red, d'ar red, d'ar red,
Er redadeg !

N'on ket skuizh, tamm ebet
O lammat e brezhoneg,
O c'haloupat e brezhoneg,
O c'hwitellat er Redadeg

N'on ket skuizh, tamm ebet
O c'hwesiñ e brezhoneg,
O c'hoari e brezhoneg,
O veajiñ er Redadeg

Redek a ran abaoe 10 vloaz
Ha n'on ket prest da chom a-sav

Deus ganin da foetañ bro
Gwel' a ri, plijadur 'vo
Asambles 'vo paket tizh
Rez ket bil ne vimp ket skuizh
O redek war hentoù Breizh
O redek evit hor yezh